

LEVRIG-C'HOARIOÙ



LIVE 2
adalek
7 vloaz



WAR-ZU AR MOR

MIRDI BREIZHEK AN DEPARTAMANT


Demat, demat deoc'h martoloded ha martolodezed !

En diskovezadeg **War-zu ar mor**, c'halli ober anaoudegezh gant luc'hskeudennoù Jacques de Thézac ha Valentin Figvier. Gant al luc'hskeudennoù-se e weli ar pezh a c'haller ober er mor : bageal, neviaf, seurfñ, 150 vloaz zo hag hiziv an deiz !

Ganet e oa bet Jacques 162 vloaz zo, luc'hskeudenner e oa ha savet en doa Goudor ar vartoloded. Tiez roz int evit degemer ar vartoloded pa ne vezont ket war vor.

Gant al levrig-mañ e c'halli gwelet an diskovezadeg en ur c'hoari.

Gweladenn vat deoc'h !




**E-kreiz da levrig ez
eus un enklask :
Ha prest out da gregiñ ganti ?**

33 bloaz eo Valentin Figvier, an 2^e luc'hskeudenner en diskovezadeg. Ar seurfrierien dreist-holl a vez luc'hskeudennet gantañ. Gant e venveg luc'hskeudenniñ modernoc'h ez eo evel pa vefe e-barzh ar wagenn pa seller ouzh e luc'hskeudennoù.

Benvegou luc'hskeudenniñ ? gwechall hag hiziv an deiz !

Kollet eo e **venveg luc'hskeudenniñ** gant Jacques. Sell en-dro dit evit e gavout ha **kelc'h an dresadenn a glot.**



Penaos e oa luc'hskeudennoù Jacques ?
E gwenn ha du, evel-just, met penaos ?


Lak an holl bazennoù en urzh en-dro
gant sikour al luc'hskeudennoù hag an objedoù a zo en armel-wer.

Laka pep a niverenn eus 1 betek 4 d'ar c'harrezennoù.



Tremen a ra al luc'hskeudenn er voest ha gwelet a reer anezhi en tu mat war ur blakenn wer all.


Moulet e vez ar blakenn war baper, gallout a reer eilaosañ traoù zo, ha diwar se Raout 3 luc'hskeudenn disheñvel gant ur blakenn, evel ma reer gant un urzhiaer hiziv an deiz !



Gant e venveg e tap Jacques skeudenn ar **Vugale** a zo o lammat eus ar choaser.

Ur c'hinnenn eus al luc'hskeudenn a weler war ar blakenn wer, met eilpennek eo ar gwenn hag an du ! Gallout a reer lakaat tammoù seizzennoù-peg evit adframmañ.

War-zu ar mor : Merdeñ dre lien



100 vloaz zo ez ae ar vartoloded war vor evit labourat : evit pesketa. Abred e veze kroget, adalek 9 bloaz !

Klask al luc'hskevden gant ar vugale yaouank-se. Hiziv an deiz e c'haller deskiñ bageal dre lien adalek 7 vloaz gant un optimist, hag a zo ur vag evit merdeñ da-unan !

Sell ouzh al luc'hskevdennoù er sal ha kelc'h ar bugel a zo lorc'h ennañ e-kichen un optimist !



Meur a zoare bagoù zo : evit bageal war vor, evit sardineta pe evit ober redadegoù tizh...

Gant sikour al luc'hskevdennoù a zo er sal, tres ul liamm etre pep bag hag ar pezh a reer ganti.



Chaloud sardineta : pesketa - labour

Al lestr-bale (dre lien) : redadeg - kevezadeg

Ar bladenn (dre bouleñvat) : C'hoari - dudi/kevezadeg



War-zu ar mor : Neual e-kreiz ar mor



100 vloaz zo ne oa ket stank ar vartoloded a ouie neual ! Hervez Jacques de Thezac e oa dav d'ar vartoloded deskiñ neual, kuit da veuziñ !

Klask al luc'hskevden-se er sal.

Jilettenoù-saveteiñ zo gant ar vartoloded. Gant petra e oant bet savet ?

Kelc'h ar respont mat.



Kapok
Ur wienn diwar plant, gant blev moan fro-dro d'ar c'hrevnenn, skañv-tre ha didrevzus.




Neopren
Kaoutchoug sintetek, plastik hag a ya aes d'e stumm kentañ en-dro ma vez gweet.

Lij
Gant rusk an derf-spoveek e farder un danvez elastel, didrevzus hag a vir an doñmder.



Kevezadegoù neual a veze : war apne (hep analiñ), gant dilhad kouronkañ, gant dilhad labour (gwisket penn-da-benn !). Hag hiziv an deiz : ar saveteerezh sport ! Klask an tudennoù war al luc'hskevdennoù er sal

ha liamm anezho ouzh o sport.



Redadeg gwisket

War apne : neual hep analiñ

Saveteerezh sport

Redadeg gant dilhad kouronkañ

Gant piv eo bet laeret...



E-kreiz un enklask luziet emañ ! Kollet eo he seurf gant Aimata ! Pa zistroas eus ar strinkerezhioù, ne oa ket war an draezhenn ken !


Abaoe un nebeud sizhunvezhioù e c'hoarvez kemend-all d'un toullad seurferien ha seurferezed ! **Hervez kont e vefe martoloded kozh o tasmantiñ an aodoù ha laerezh a rafent an traoù-se a gavont spontus : ar plankennoù seurf !**

Prest eo Aimata da dalañ ouzh holl tasmantoù an draezhenn avat ! Ha prest out da sikour anezhi ?

« Merdeñ dre lien »

Klask ar munudoù-se er sal...

Piv eo an hini koshañ e-touz an 3 se ?



Skriv amañ 3^{de} sifr ar bloavezh ma oa bet krovet, evit delc'her ur roud anezhañ : _____

« Neual e-kreiz ar mor »

Evit ar genstrivadeg neual en Enez-Tudi e voe implijet ur blakenn hepken evit ober meur a luc'hskeudenn, bern-ouzh-bern, hag an disoc'h zo tasmantek ! **Pet Penn-sardin a gontez war an dour ?**

Diwall diouzh an tasmantoù !

Anavezet e vezont diouzh o c'hoef. →



Sammañ a rez an 2 niverenn a ya d'ober an niver az peus kavet hag e skrivez amañ ar sifr, evit delc'her ur roud anezhañ : _____

...seurf Aimata ?

« Riklañ war ar gwagennoù hag en avel »

Klask al luc'hskeudenn lec'h m'eo bet tapet ar gerioù-se. →

Sell ouzh ar voger a-bezh (4 luc'hskeudenn) ha **kont an niver a seurferien en dour.**



Skriv amañ ar sifr, evit delc'her ur roud anezhañ : _____

« Seurfiñ a-gevret, dizoloiñ ha treuzkas »

Disifr ar c'hod morse-mañ evit gouzout e peseurt lec'h er mirdi eo kuzhet an arc'h a zo anv al laer enni !

Gallout a rez en em harpañ war al lizherennaoueg.

• •• •—• •— •—• • —•• • —•• • —•• • —••
• —• —•• • •• —•• •—•

Skriv da respont amañ : _____

Klask an arc'h ha gra gant da sifroù evit kavout an diskoulm mat !



War-zu ar mor : Riklañ war ar gwagennoù hag an avel

« Dañterus eo ar mor, arabat c'hoari ennañ », eo ar pezh a vez lavaret ingal gant ar vartoloded kozh. Fovezus eo neuze anavezout ar mor, kompren liv an amzer, nerzh ar gwagennoù...

Dit-te da sellat pizh ovzh ar mor i Sell ovzh ar voger leun a luc'hskevdennoù, ha kelc'h

al luc'hskevdennoù a zo bet kemeret en 21^{vet} kantved. Gant Valentin Figuerint bet kemeret




Kinki da seurf
evit riklañ war ar gwagennoù kaerañ a zo !



Kreionoù liv er sal : « RIKLAN WAR AR GWAGENNOÙ HAG EN AVEL »
Havout a ri

War-zu ar mor : Riklañ war ar gwagennoù hag an avel

Labouret en deus Jérémy Lucas da sevel ur plankenn seurf e Breizh gant...





Klask ar seurf-se evit klokaat ar frazenn evel m'eo dileet

Gwechall e oa an oberezhioù mor evit ar baotred hepken. Hiziv an deiz n'eo ket gwir ken avat.

klask poltredoù ar merched e-kichen re ar baotred a-benn ar fin ! Desket e vez ober seurf a-rumm-da-rumm, ar re yaouank digant ar vras.



Aet eo Floise diwar wel war al luc'hskevdennoù. Kerzh gant an hent mat evit ma c'hallfe distreiñ gant Aurelien.



Demat, demat deoc'h ha martoloded !

martoloded



En diskovezadeg **War-zu ar mor**, c'hall! ober anaoudegezh gant luc'hskevdennoù Jacques de Thézac ha Valentin Figuer. Gant al luc'hskevdennoù-se e well! ar pezh a c'haller ober er mor : bageal, nevia, seurfñ, 150 vloaz zo hag hiziv an deiz !

33 bloaz eo Valentin Figuer. Ar seurferien dreist-holl a vez luc'hskevdennet gantañ. Gant e venveg luc'hskevdenñ modern ez eo evel pa vefe e-barzh ar wagonn pa seller ouzh e luc'hskevdennoù.




Gant al levrig-man e c'hall! gwelet an diskovezadeg en ur c'hoari.




Gweladenn vat deoc'h !

E-kreiz da levrig ez eus un enklask : ha prest out da gregin ganti ?

Ganet e oa bet Jacques de Thézac, 21 luc'hskevdenner an diskovezadeg, 162 vloaz zo. Savet en doa Goudor ar vartoloded. Tiez livet e roz int evit degemer ar vartoloded pa ne vezont ket war vor.



Valentin Figuer



Klask ha kelc'h ar 5 diforc'h etre luc'hskevdenner da levrig hag hini ar sal !

MIRDI BREIZHEK AN DEPARTEMANNT

WAR-ZU AR MOR

LIVE 2
adalek
7 vloaz

LEVRIG-C'HOARIOU

